

Ar reperiou bras :

1) Istor :

a) C'hwec'hvet :

VIIIvet milved kent J-K: ganedigezh al labour-douar: ar c'hresk strujus e Mezopotamia

IVvet milved kent J-K ganedigezh ar skritur : hieroglifoù get an Ejiptiz , skritur gennheñvel ha lizherenneg.

Ilvet milved kent J-K:Prantad ar Bibl : hervez ar Bibl, e-kerzh e oa bet roet taolennoù al lezenn (les tables de la loi, décalogue) da Voiz get Doue.

Tro-dro 600 kent J-K : savet eo Massilia get ar Phoceiz .

Vvet kantved kentJ-K: Aten en he barr . Periklès en doa lakaet sevel ar Parthenon : un templ (un neved) en inor d'an Doueez Atena.

IIIvet kantved kent J-K : Archimède(matematikour, skiantour).

52 kent J-K Trec'h eo Cesar à Versingetorix en Alezia : a ra e zilez da Gaezar. Roman e ta Galia da vout.

Kantved kentañ : Derou ar gristeniezh : blezad unan : ganedigezh Jezus e Galilea.

An eil kantved :an impalaeriezh roman en he barr : ur c'hantved a beoc'h a zo er broioù edan beli Roma. Ar peoc'h roman e vez anvet an dra-se. Kreskiñ a ra ar c'hêrioù roman.

Vvet kantved (476): Diskar an impalaeriezh roman : Disemglev a zo e diabarzh an impalaeriezh roman. Diskaret eo get ar Varbared daet niverus-bras da Europa.

b) Pemvet

E 496 :badeziant Klovis :, Klovis, roue ar Franked a zo badezet get Sant Remi, eskob Reims,Kristen e ta rouantelezh ar Franked da vout.

E 622 : an Hidjra :krogiñ a ra an deiziataer muzulman, pa oa bet kuitaet ar Mekka get Mahomet da Yathrib(Medina hiziv-an-deiz) . An Hidjra a vez anvet an dra-se.

E 800: e oa bet kurunet Karl Veur , roue ar Franked. Get ar Pab e oa bet roet dezhoñ ar gurunenn a impalaer. E Aachen (Aix-la-chapelle) emañ e annez).

E 987: e oa bet dilennet an dug Hugues Capet roue a vro-C'hall, krouiñ a reas dinastienn ar Gapeted.

1214: emgann Bouvines

1270: marv Sant Loeiz (Louis IX) roue.

XIIIvet kantved : prantad an Ilizoù meur é kreskiñ. Emañ an arz gotek àr greskiñ

E 1453: An Durked a aloubas Konstantinopolis, hag a ziskaras evel-se an impalaeriezh otoman.

E kreiz ar XVvet kantved: e oa bet ijinet get Gutenberg ur mekanik da voulliñ. Get an dra-se e oa bet tu da vanniñ al levroù. Ar Bibl eo al levr moullet kentañ.

E 1492 : Dizoloet eo Amerika get Cristobal Colon . Kemeret eo Grenada get ar Spagnoled, trec'het eo ar rouantelezh arab diwezhañ a vro-Spagn.

E-kerzh ar XVIvet kantved: ar Reform get Kalvin ha Luther a lak disemglev en Europa kristen.

1572: lazhadeg Sant Barthélémy

Pevarvet :

XVIvet kantved: reformoù protestant

Etre 1661 ha 1715: ren personel Louis XIV ; Ar-greñvaat eh a ar vonarkiezh hollveliel. Arouez ar galloud hollveliel eo kastell Versailles.

1685: torridigezh skrid-embann Naoned

E-kreiz an XVIvet kantved: An Encyclopedie , embannet, a zegas soñjoù nevez. Difennet eo get Voltaire. Get prededourien ar Sklêrijenn emañ lakaet an hollveliegezh en arvar.

En eil lodenn ag an XVIIIvet kantved, : e oa bet ijinet get James Watt, ur mekanik get aezhenn. Deroù an oad industriel

14 a viz gouhere 1789: e oa bet kemeret ar Bastille, Savet e oa bet disklêriadur gwirioù Marden.

E 1792-1794: : emañ diskaret ar rouantelezh , krouet eo ar Republik(ar Goñvañsion), get soñjoù nevez.

E 1804: Anvet eo impalaer Napoleon kentañ. An impalaeriezh kentañ a zo diskaret e 1815 goude d'ar frañsizion bout bet trec'het e Waterloo.

1814-1815: Kendalc'h Wien

Etre 1815 ha 1848 : Ur vonarkiezh vonreizhel e ta bro-C'hall en-dro ar rouantelezh
An eil Republik : goude dispac'h 1848 e oa bet savet an eil republik : ne badas ket pell met traoù a-bouez a oa bet graet geti : diskar ar sklavaj, ar sufraj hollek.

1848-1852: an eil Republik(torridigezh ar sklaverezh, mouezhiadeg hollek evit ar baotred)

1852-1870: an eil Impalaeriezh :goude taol-diskar-Stad get Louis-Napoleon Bonaparte (Napoléon III) e ta bro-C'hall da vout an eil impalaeriezh.

Etre 1870 ha 1940: an trede Republik : Al lod-muiañ ag ar frañsizion a ya a-du get ar Republik.

1881-1882: lezennoù skoliata war ar skol kentañ derez, digoust, laik ha ret evit bugale etre 6 ha 13 vlez get Jules Ferry.

1885: Dizoloadennoù Louis Pasteur a gas à-raok skiant ar medisinerezh(vaksinoù enep droug ar c'hi)

1898 : Implij a ra Emile Zola ar c'hazetennoù evit sevel a-enep kondaoniñ ar c'hapiten Dreyfus rebechet dezhoñ bout bet treitet e vro. An afer Dreyfus e vez graet ag an darvoud-mañ.

Trede :

eost 1914 : ar brezel-bed kentañ é komañs

1917 : an dispac'h rusian

11 du 1918 : arsav-brezel

1929 : kolektivizadur an douaroù en URSS

genver 1933 : Hitler kañseller

1935 : lezennoù Nuremberg

1936 : lezennoù sokial an Talbenn ar Bobl

1936-1938 : Prosezioù bras Moskow

gwengolo 1939 : aloubet eo Polonia get Hitler

18 mezheven 1940 : galvadenn ar Jeneral de Gaulle

1944 : ar gwir da votiñ evit ar maouezi

1945 : ar surentez sokial

8 mae 1945 :arsav-brezel an eil Brezel-Bed

1947 : framm Marshall

1947 : dizalc'h e ta India da vout.

1949 : Republik werinel Sina

1954-1962 : Brezel Aljeria

1957 : feur-emglev Roma

1958-1969 : ar blezadoù De Gaulle

1981-1995 : ar blezadoù Mitterrand

1991 : diskar an URSS

1992 : emglev Maastricht

1.Merkoù pennañ war an douar

Geografiezh :

Al ledennoù : Ar c'heheder , trovan ar c'hrank, trovan ar c'havr, kelc'h polel norzh, kelc'h polel su.

An takadoù : yen, kerreizh, toemm.

Ar c'hevandirioù : Afrika, Amerika, Azia, Europa, Oseania

Ar meurvorioù : ar meurvor Atlantel, Habask, Meurvor Indez, meurvor Skorneg Arktika, Antarktika

Ar strizhoù-douar (les isthmes) : Strizh-douar Panama ha strizh-douar Suez.

Ar strizhoù-mor (détroits) : Strizh-mor Gibraltar.

Ar chadennoù : An Alpoù, an Andoù, an Himalaya, ar menezioù Roc'hellek, Aradennad an Andoù

Ar c'hoadeier : Amazonia, Afrika-kreiz

An dezerzhioù (gouelec'hioù) bras : ar Sahara dreist-holl.

Ar stêrioù-meur brasañ : ar stêr-Amazon, ar C'hongo, Ganga, Nil, ar stêr-Mississippi, Yangzi.

2.Poblañs, Stadoù , kêrioù bras

Lec'hiiñ ar broioù-mañ : Maroko, Aljeria, Tunizia, Bro-Ejipt, India, Sina, Bro-Japan, ar Stadoù-Unanet, bro-Ganada, Bro-Mec'hiko, Bro-Vrazil.

Takadoù poblet stank : Biz Amerika an Norzh , Europa, Azia ar Reter hag Azia ar Gevred, Pleg-mor Ginea Gevred Brazil , Su Azia

Ar megalopolennoù amerikan, european ha japanad.

Ar c'hêrioù-mañ : Kaero, Pekin(Beijing), Shanghai, Bombay, Kalkutta, Tokyo, New-York, Los-Angeles, São-Paulo, Mec'hiko.

3.Europa :

Ar morioù : ar mor Kreizdouarel, mor an Hanternoz, ar mor Du, ar mor Baltek, mor Breizh.

Ar stêrioù-meur bras : an Danub, ar Rin, ar Volga.

Ar Stadoù en Europa :

Albania, Bro-Alamagn, Aostria, Belgia, Bielorussia (Belarus), , Bulgaria, Kiprenez (Chypre), Kroatia, Danmark, bro-Spagn, Estonia, Bro-Finland, bro-C'hall, Gresia, Hungaria, Bro-Iwerzhon, bro-Island, Italia, Latvia (Lettonie), Lituania, Luksembourg, Makedonia, Malta, Moldavia, Bor-Norvegia, Izelvroioù, Bro-Sweden, Turkia, Ukraina, Yougoslavia, Polonia, Bro-Bortugal, ar Republik Tcheki, Roumania, Ar Rouantelezh-Unanet, Rusia, Slovakia, Slovenia.

Stadoù an Unvaniezh European hag o c'hêrbennoù : Bro-Alamagn (Berlin), Aostria (Vienna), Belgia (Bruksel) Danmark (Kopenhagen) bro-Spagn (Madrid), Bor-Finland (Helsinki) bro-C'hall (Pariz), Bro Chres (Aten), Bro-Iwerzhon (Dulenn), Italia (Roma), Luksembourg, Izelvroioù (Amsterdam) bro-Bortugal (Lisboa) Rouantelezh-Unanet (Londrez), bro-Sweden (Stockholm).+ an 12 arall

4. Bro-C'hall :

Ar stêrioù-meur : ar ster-Garona, al Liger, ar Ron, ar Rin, ar Saena.

Ar menezioù : an Alpoù, ar Jura, an Tolzennad kreiz, ar Pireneoù, ar Vogezoù ; diazad Pariz,